

Ar Plac'h

Ma vefe red din brezelii,
 Me rofe plom d'un ennemi,
 Me zisocelfet ma c'hourach
 En creis an tan, en creis an tan
 Vin ket plac'h treitour na tach
 Da denna'r Prussian.

Ar Goaz

Va mestres ker, an kreis an tan,
 Evit eur plac'h so re a boan,
 A gant trous ar c'hanollou,
 Taufez bouzar, toufez bouzar,
 A gant ners ar mitrailou,
 E cwefes d'an douar.

Ar Plac'h

Ma ne c'han da vrezellii,
 Da renis fas d'an ennemi,
 Me a vo cantinières,
 Er regimant, er regimant,
 Me ranko mont ganel
 Evel gwir plac'h vaillant.

Ar Goaz

Neuze ta va douc Mariyon,
 Quitelomp on daou or c'hanton,
 Ben eun neubeutik amzer
 Gant gras Douc, gant gras Douc
 Nin a retorno d'ar gaer.
 D'or bro a d'or c'hontro.

Partiet int d'ar regiment
 O dsou gant eur galon gontant,
 Da servicha an drapo,
 Int partiet, in partiet,
 A betek eur a maro,
 Vefont fidel bepret.

Cetu aze, va mignouet,
 Daou den en em garie parfet
 Ob ia, bars an honestis,
 A barfetet, a barfetet,
 Gret evelthe, yaouankis,
 Bezit fidel, bepret.

— FIN —

EUN DEMEZI GRET GANT AR VAM

Var (ou) ROSETTE.

Ar Vam

Eru eo ar moment, {bis
 Va merc'h, ret eo dimezi
 A da sonjal breman,
 Petra peus da ober,
 Da guitat a renkan,
 Ag ar bed dilezer

Ar Verc'h

Va mam ne gomzit {bis
 Din c'hoas deus a dimezi
 Rag ysouankik hon c'hoas,
 Da vont da ren ar bed,
 Ne meus nemet c'hwezek vloas,
 Demezi na rin ket.

Ar Vam

Va merc'h, zent diouzin {bis
 Rog ma quitain ar bed,
 Gant son em goude
 E neur gafes tromplet.
 Ag ar rest ar vue
 Malhevrus var ar bed.

Ar Verc'h

C'hui ne noc'h ket prest c'hoas {bis
 Va mam da zont dam c'huitat
 Ben neubeut blavezioù
 Vin muioc'h avanset
 A ben fin ho teio,
 Me a mo ma choas gret.

Ar Vam

Va merc'h, eun den yaouank {bis
 A zo demeus da c'houlou
 A zo den a zoare,
 Hervez ma seblant din,
 A den a galite,
 Kemer n'han hardi.

Ar Verc'h

Va mam, en ho coeni {bis
 Ne glean ket ho reus ;
 Ma ran eur parti fall,
 Neur glem na rin biken
 Mez c'hui deut da zlouzal
 Ne pe goude anken.

Ar Vam

Va merc'h, me en assur {bis
 Deus ar pez a meus laret
 Gant lieuz vi contant,
 Tre ma vi ver ar bed ;
 Dimez hep ne hamant,
 Bara did vanko ket.

An Dimezi

Cetu ta dimezet {bis
 Ar plac'hik gant he mam
 D'an oad a c'hwezek vloas,
 Da vont da roull ar bed,
 A goud petra re c'hoas,
 Alias ! ne ouie ket.

Ar Blijadur

Eur pennad e zint bet {bis
 O veva gant blijadur,
 Siouas an evrested,
 Er bed neo ket padus,
 Rag homan e deuz bet
 Eun den gwel dangerus.

An Dizeper

Ouspen, meo, divalve {bis
 Eo, sur ive bambocher
 An arc'hant a c'houne
 Entro pad ar zizon,
 Ve lonket en eun de
 Ag he vreg chom da yun.

Ar gwel Vue

Pa neur gav c'hoas er gaer, {bis
 E comans d'ober boe
 Tolet ha distalet,
 Alias bazateot,
 Cetu ta ar vue
 Zo entre daou bried.

Ar vam Dezolet

He mam, pa deuz gwel {bis
 Ar vue voa entreze
 A zo bet dezolet,
 O velet he dao gret
 Malheur he merc'h caret,
 Tre rize var ar bed.

Avis

C'hui tadou ha mamou, {bis
 Ne ret ket evel homan
 Ne deut ket da bressi
 Dimez ho pogale
 Gant aoun, evelthi,
 O pefe keuz goude.

Lent ho pogale {bis
 Ho eun d'ober ho choas,
 Pa eo int rank usa,
 Eo just d'he choas ive,
 Ma ne larit netra,
 Vefet divlam goude.

— FIN —